



SYNDICAT NATIONAL DES RADIOS LIBRES

■ **Ensemble, on est plus fort !** ■

SINDIKAD BROADEL AR SKINGOMZIOU DIEUB
Kreñvoc'h omp a-gevret !

**Yezhoù Frañs,
vektorioù hep o far da virout
ha da ziorren al liesseurted sevenadurel**

Embann a ra an SNRL pegen tomm eo ouzh pennaennoù Kendivizad Sevenadurel Europa an 19 a viz Kerzu 1954 bet peurwiriekaet gant Frañs d'an 19 a viz Meurzh 1955, evel d'ar feurioù-emglev deuet diwarnañ : *"Karta Europa ar yezhoù rannvro pe bihanniver"* eus ar 5 a viz Du 1992, sinet ha chomet hep bezañ peurwiriekaet d'ar 7 a viz Mae 1999, hag ivez kendivizadoù ha protokoloù a-zivout ar mass-mediaoù gant Kuzul Europa.

Karout a rafe an SNRL e vefe peurwiriekaet Karta Europa ar yezhoù rannvro ha bihanniver gant Frañs, o terc'hel kont eus evezhiadennoù Disklêriadur Frañs, merket pa oa bet sinet ar Garta d'ar 7 a viz Mae 1999.

Evit a sell ouzh talvoudegezh ar glad sevenadurel evit ar gevredigezh e fell d'an SNRL pouezañ war engouestl Frañs e Kendivizad-stern Kuzul Europa eus ar 27 a viz Here 2005, er mellad 14 peurgetket hag ent resisoc'h en dilinennad a) a sav a-du gant *"an oberoù a wella perzh ar pezh a vez skignet hag a ya war-du kadarnaat liesseurted ar yezhoù hag ar sevenadurioù e kevredigezh ar c'helaouiñ"*.

Goulenn a ra an SNRL digant Ministrerezh ar Sevenadur hag ar C'hehentiñ ha digant Renerezhioù Sevenadurel ar strollegezhioù tiriadel e vefe termenet ha lakaet da dalvezout ur politikerezh skingas yezhoù a waranto eztaol, miridigezh ha diorroidigezh ar glad yezhel e Frañs hag er strollegezhioù tramor ha laouen e vefe o vezañ lakaet da gemer perzh evel dileuriad an oberataerien skignañ e savidigezh ar politikerezh-se.

Kinnig a ra an SNRL e vefe kas war-raok ar yezhoù rannvroel ha lec'hel un elfenn dalvoudekaus eus labour desavadurel ha sevenadurel ar radioioù pa vez anv a reiñ skoazell publik reoliek ar Font Skoazell d'ar Skingomzerezh Lec'hel.


Kinnig a ra an SNRL e vefe dalc'hel kont da vat eus ar produiñ abadennoù pe eus an engouestl dre gevrat da broduiñ abadennoù e yezhoù rannvroel pe lec'hel er raktres da suraat al liesseurted e-keñver sevenadur pe sonerezh pa vez roet frekañsoù analogel ha niverel gant ar CSA (Kuzul-meur ar C'hleweled). Mat e vefe d'an SNRL ez afe an diferadur-se d'ober un ali pe un erbedadenn bennak gant Kuzul-meur ar C'hleweled.

Karout a rafe an SNRL e rofe o ger ar Rannvroioù hag ar strollegezhioù tiriadel da zegas ur skoazell dibar d'ar radioioù a skign abadennoù e yezhoù rannvroel pe lec'hel, ouzhpenn ar skoaziadennoù mont en-dro rannvroel, hag e vefe enskrivet an diferad dibar-se er Fontoù Skoazell d'ar Skingomzerezh Lec'hel. Evit mont war an tu-se e kinnig an SNRL da Gevredigezh Rannvroioù Frañs, da Vodad Departamantoù Frañs ha da Strollegezhioù Tramor, ur priziadur evit kas war-raok ar skingas kevredigezhel hag al liesseurted sevenadurel war o zachennoù.

Karout a rafe an SNRL e vefe anavezet hag arc'hantaouet gant an AFDAS, OPCA kendivizadel ar skingas, ar stummadurioù kinniget e framm ar stummañ micherel ha dibaouez da varrekaat ar c'hopridi hag ar sternerien a-youl vat evit ober gant yezhoù Frañs. Mat e vefe ivez anavezout an ober gant ar yezhoù-se war al labour en argerzh Talvoudekaat ar Skiant-Prenet (VAE) hag o lakaat sklaer e labourioù an Arsellva Imbourc'hiñ war Micherioù ar C'hleweled er CPNEF-AV.

En e ober etrebroadel, e raio e seizh gwellañ an SNRL, ezel eus an Emglev Hollek evit al Liesseurted Sevenadurel en UNESCO, evit ma vefe an AMARC (Kevredad Bedel ar Skingaserien Gumuniezhel) ha kevredadoù broadel ar skingomzioù kevredigezhel ha kumuniezhel o sevel a-du gant skoazellañ ar yezhoù rannvroel ha lec'hel, glad eus an denelezh.

**Siège social : Tour Paris-Pleyel - 153, Bd Anatole France - 93200 Saint-Denis, France (métro "Carrefour Pleyel" ligne 13)
www.snrl.org - Présidence : 04.91.55.56.85 et snrl@online.fr - Relations Adhérents et FSER : 04.93.36.90.89 et snrl@wanadoo.fr**

SYNDICAT DÉCLARÉ SELON LA LOI DU 21 MARS 1884, N° D'EXISTENCE 93 B 04-184 DU 22 MARS 2004 MEMBRE DE L'ALLIANCE POUR LA DIVERSITÉ CULTURELLE DE L'UNESCO 

Le SNRL est l'organisation professionnelle représentative des radios locales de catégorie A régies selon la Loi de 1986. Elle rassemble, au titre des dispositions du Livre IV du Code du Travail, les radios associatives réunies par une charte de référence à la Déclaration Universelle des Droits de l'Homme, à la laïcité et à la Charte des journalistes, indépendantes des pouvoirs économiques, confessionnels et politiques. Le Syndicat National des Radios Libres est membre de l'USGERES, l'Union des Syndicats et Groupements des Employeurs de l'Economie Sociale, union interprofessionnelle représentative des associations, fondations, mutuelles et coopératives.